

II. KANTIK AR BARADOZ

- | | |
|--|---|
| <p>1. Jezus pegen braz e
Plijadur an ine
Pa vev en gras Doue,
Hag en e garante !</p> <p>2. Ber kavan an amzer
Hag ar poaniou dister
O sonjal de ha noz
E gloar ar Barados.</p> <p>3. Pa zellan en Envo,
Etrezek ma gwir vro,
Nijal di a garfen
Evel eur goulmik wen.</p> <p>4. Gant joa e c'hortozan
An termen diwezan,
Hast am euz da welet
Jezus ma gwir bried.</p> <p>5. Kerkent ha ma vezo
Torret ma chadeno
Me a zavo en er
Evel eun alc'houeder.</p> <p>6. Tremen a rin al loar,
Evit monet d'ar gloar,
Dreist an heol, ar steret,
Me a vezo douget.</p> <p>7. Pa vin uz d'an douar,
Traonien leun a c'hlac'har,
Neuze me rei eur zel
Ouz ma bro Breiz-lzel.</p> <p>8. Dezi me a laro :
Kenavo d'id, ma bro,
Nag a daerou skuillet
En-oud, bro veniget !</p> <p>9. Kenavo da viken,
Paourente hag anken,</p> | <p>Kenavo pec'hejou,
Trubuil ha klenvejou !</p> <p>10. Pelloc'h na zoujin ket
Ardou an drouk-speret :
Netra ken n'am sponto
Goude tol ar maro.</p> <p>11. Goude tol ar maro
Joaüs me a gano :
Torret eo ma chaden,
Libr on da virviken !</p> <p>12. A bep tu pa zellin
Kement tra a welin
A rei d'am daoulagad
Ha d'am c'halon mil vad.</p> <p>13. Doriou ar Barados
Digor ouz ma gortos
Ar zent, ar zentezet,
War o zron azeet.</p> <p>14. Me vo digemeret
E pales an Dreindet
E kreiz an enoriou
Hag ar meulodiu.</p> <p>15. Me hello, evit mad,
Gwelet Doue an Tad
Gant e Vab eternal
Hag ar Speret-Zantel.</p> <p>16. Me a welo Jezus
'N eur c'hoarzin dudius,
O lakat war ma fen
Eur gaer a gurunen.</p> <p>17. Evit poaniou dister,
Evit ankeniou ber,
Me a vo pevet mad
Gant Doue ma gwir Dad.</p> |
|--|---|